

# CANTIC

var

(Carnoet)  
mission

## MISSION CARNOET,

ER BLA 1854.



Var an ton gallec : *Loin de Jésus que j'aime...*



1. Eurus breman a galon  
Unissomp hon moëziou  
Da gana hon Mission ,  
Da gana canticou.  
— O Mission benniguet !  
O tensor a c'braçou !  
Chommet , chommet imprimet  
Dôn en hon c'halonou.
2. Tostic da zaou c'hant vla-zo ,  
Aboa an Tad Maner ,  
Na voa quet bet en hon bro  
Clevet missionner. — O...

3. Ar c'hraç-ze quen precius  
Deomp-ny zo bet miret ;  
Trugare dac'h , ma Jesus ,  
Ha d'ho Mam benniguet. — O...
4. Mission c'houi a zo bet  
Talvoudus dreist an aour ,  
Graç Doue oc'h eus roët  
D'ar pinvic ha d'ar paour. --O...
5. D'an den zo gantan collet  
An hent da vont d'e vro  
Caerat joa eo hadcavet  
Ar guir hent a zistro. — O...
6. D'ar paour pelzo er vizer  
Caerat eo abundanç !  
D'an den pelzo ~~or~~ prisonier  
Caerat eo delivranç ! — O...
7. O caerat eo d'un den clanv  
Bea rentet pare !  
O caerat, goude ar goanv,  
Eo an amzer neve. — O...
8. C'houi zo caeroc'h , Mission ,  
C'houi hon dibrizonia ,  
C'houi a yac'ha ar galon ,  
C'houi eo he vinvica. — O...

9. Deus ar pec'her ar galon ,  
 Douar a vrug ha lan ,  
 Dre ho ners , ô Mission ,  
 Zo douar mad bremañ. — O...
10. C'houi oc'h eus sclærigennet  
 Gant bëaul an envoñ  
 Ar pec'her paour azeet  
 Bars en squeud ar maro. — O...
11. C'houi c'heus græt dezan laret :  
 O peguen dallet on !  
 Da veva tranquil bepret ,  
 Ar pec'het em c'halon ! — O...
12. C'houi c'heus græt dezan laret :  
 Na perac couscoude  
 Na zeufen quiet da garet  
 Ma Jesus , ma Doue ? — O...
13. C'houi c'heus græt dezân laret :  
 Perac ma blasphemou ?  
 Na perac dre gant pec'het  
 Outraji ma Autrou. — O...
14. C'houi c'heus græt dezan laret :  
 Zul ha gouel a virin ,  
 Pa zint gant Doue roet  
 Evit m'en zervijin. — O...

15. Da deüni ha da veva  
Ho bugale divlam  
Da dad ça vam c'houi e ra  
Daoulagat neve-vlam. — O...
16. C'houi c'heus græt dezo laret :  
Ya , re a liberte  
Bete breman hon eus bet  
Roet d'ar vugale. — O...
17. O terruplat carg ez eo  
Ar garg a vugale !  
Da Zoue ny a rento  
Ene evit ene. — O...
18. En ho zud d'ar vugale  
C'houi c'heus reit da velet  
Ar re a zo gant Doue  
D'ho c'helen quen carguet. — O...
19. Er galon ar gassoni  
C'houi a zeu da laza ,  
C'houi e ra deomp pardoni  
An offansou brassan. — O...
20. C'houi a zo deut da denna  
Deus ar galon an drein ;  
C'houi zo deut da zivreina  
Eneou a voa brein. — O...

- 5 —
21. C'houi evit vertu Mari ,  
Evit ar burete  
A laqua da sederi  
Daoulagat hon ene. — 0...
22. An injustiç er vro-ma  
Græt na vo quen guelet ,  
Ha pep gaou ous an nessa  
Græt m'e vo reparaet. — 0...
23. C'houi a zo deut da doma  
Ar galonou scornet  
C'houi zo deut da digamma  
Ar galonou camet. — 0...
24. C'houi c'heus d'ar galonou mad  
Roet un tan neve  
Da grenvat ha d'ardantat  
En carante Doue. — 0...
25. Deus an ivern ar bleidi ,  
An arraj er galon ,  
En dro dac'h vo o rodi  
Vit ho caç d'ho vrison. — 0 ..
26. Hoc'h adversourien goassan  
Na vo quet an diaoulou ,  
Nan , ar re dangerussan  
Vo ho caranteou. — 0...

27. Satan en devo bepret  
Aman hac elec'h all  
Tud a zo gantan gopret  
Da rei partout scandal. — O...
28. Ar re fidel, ar re vur  
A vo ganto goapel ;  
Dre gant mil displijadur  
D'ar pec'het vint do<sup>v</sup>guet. — O...
29. Mæs<sup>?</sup> comptant an eneou  
D'an drouc ho deus douguet  
Deus a ze ho zourmantchou  
Vo en ivern cresquet. — O...
- 30 Mes, c'houi, eneou zantel,  
Bepret c'houi a vezo  
Da Zoue ferm ha fidel  
Fidel bete ar maro. — O...
31. Nac e vehe ar re all  
Ha treitour hac ingrat,  
Na vet buquen disleal  
Na quitted quet ho Tad. — O...
32. Mar bec'h goapel gant tud val  
Ar re vad ho meulo ;  
Lest d'en em goll ar re dall,  
Mæs c'houi êet d'an envou. — O...



33. Oll alies tostaët  
Ous ar gommunion ;  
Mar couezet , prim had zavet  
Dre ar govision. — O...
34. Ho pet zonz deus an dorn du  
An tri hent n'ancouet quet ,  
Hac an hent deus ar vertu  
En pep tra quemeret. — O...
35. Yaouanquis , var ziôu zaulen  
Ho hanoyou scrivet  
D'an oll e ra da gompren  
Ar vurnez a heuillet. — O...
36. C'houi ive , bugaligou  
C'heus bet ho mission ;  
Zonjet er medalennou  
Oc'h eus var ho calon. — O...
37. Ar barouz oll da Vari  
A zo bet consacret ;  
Douguen e ra pep hini  
He habit benniguet. — O...
38. Un tensor all a c'hraçou ,  
Hent ar groas , Carnodis ,  
Zo vit mad hoc'h eneou  
Breman en hoc'h ilis. — O...

59. Mari , Mam a garante ,  
Zænt hac ælet eurus ,  
Græt deomp enpad hon buhe  
Carout , carout Jesus. — O...

40. Cant trugare d'hon Tadou  
Ha d'hon c'honfessorel ;  
Ha graç deomp oll en envou  
Un de d'en em velet. — O...

